


Istor ar sonerezh



Cathy Berberian :

Ur ganerez amerikan eo Cathy Berberian (1925-1983). Sonaozet he deus *Stripsody* e 1966.

Dont a ra titl an oberenn-mañ eus daou c'her : Strip (comic strip a dalv bannenn-treset e saozneg) ha Rhapsodie (ur pezh sonerezh he deus ur stumm dieub).

Un oberenn a cappella evit ur vouezh maouez eo *Stripsody*. Ur begadenn a sonioù eo, hep aozadur da vat, hag hep liamm etrezo.

Glenn Gould :

Pianoour ha sonaozour e oa ar c'hanadian Glenn Gould (1932-1982). N'eo ket gwall anavezet e oberennoù : brudet eo Glenn Gould, dreist-holl, peogwir eo unan eus ar gwellañ pianoourien a zo bet en XX^{vet} kantved. Seniñ a rae oberennoù BACH en un doare dibar.



Georges Brassens :

Ganet eo Georges Brassens (1921-1981) e Frañs. Barzh, saver kanaouennoù, sonaozour ha kaner e oa. Eilañ a rae e ganaouennoù gant ar gitar. Enrollet en doa 14 albom.

Kalz eus e ganaouennoù zo brudet-kenañ, evel *Les copains d'abord*, *La mauvaise réputation*, *l'Auvergnat*... Lod anezho zo bet lakaet e brezhoneg gant Mark Kerrain (an den en deus troet Harry Potter !).

Ni a zesk : _____

Titl ar ganaouenn-mañ e galleg eo : _____

